

## KIS-496 – Gl. général, universel

(GE da YBAN – 23 06 96)

Len a ran er § 118 eus da zanvez dornlevr *Jedoniezh* :

An arouez  $\forall$  eo hini un niñvader unadek (Gl. *opérateur unaire, monadique*) anvet kementader **hollveziadel** (Gl. *quantificateur universel — beziat* eo ar perzh *p* evit an *holl* elfennoù) pe ivez kementader **hollerdaladel** (ar perzh *p* a sell ouzh *holl erdalad* E) pe c'hoazh **hollerdalader**.

[...]

An arouez  $\exists$  eo hini un niñvader unadek anvet kementader **beziadel** (Gl. *quantificateur existentiel — beziat* eo ar perzh *p* evit un darn eus an elfennoù, eleze unan da nebeutañ) pe ivez kementader **darnerdaladel** (ar perzh *p* a sell ouzh un *darn* eus *erdalad* E) pe c'hoazh **darnerdalader**. A-wechoù e lavarar ivez kementader **dibarek** (Gl. *quantificateur particulier*).

Un evezhiadennig da gentañ : kentoc'h eget *hollveziadel*, *hollerdaladel* e rafen amañ gant *hollveziat* (o vezañ, *beziat* evit an *holl*), *hollerdalat* (o talvout, *talat* evit an *holl*).

Ar gudenn a savez gant **hollek** hag **hollveziat/del** ne denn ket d'hon yezhouriezh hepken, met ivez da istor ar Brederouriezh. Sell da skouer FOULQUIE, 1986, p. 743 an dislavar e B. etre despizadur poelloniell Gl. *universel* roet gant an aozer (un afer a erdalad), hag an despizadur roet gant G. MARCEL (un afer a entalad). Dav eo merkañ ivez e vez graet kensterioù eus Gl. *général* hag *universel* e kalz degouezhioù. An despizadur sklaeriusañ eo an hini roet gant ARISTOTELES da *to*; *kaqovlou*, *universel*, gouez da LE BLOND meneget en hevelep pajenn, o lakaat kevempleg “ piaouañ un anien ” ha “ bezañ hinienn eus ur rumm ”, eleze dre ober eus an “ *universel* ” ur *retvez*, un *dezv*, ur *c'hentouez* ; endra ve ar “ *général* ” ur *c'heal* diwar *stadañ*, un *dianouez*.

Anat eo ne c'hell ket talvout ar ster-mañ eus *général* evit ar Jedoniezh nad eo ket un diskiblezh diwar arsellin ar bed kantouezel hag a zo he fennaennoù *dezvoù* ha n'eo ket *savelennoù* : ganti ne c'haller komz nemet eus *universel*.

E KIS-184, La-07, pp. 67 hh. ez on aet da heul VALL. p. 333, o tegemer **hollek** a-dal da Gl. *général*, ha goveliet 'm eus Br. **dibarek** evel kevatal da Gl. *particulier* e

ster ar Boelloniezh klasel, eleze : “**Dibarek** [eo an erganad] a sell ouzh un nebeut hiniennoù eus ur rumm” (pa rae VALLEE gant **kevrennek** er ster-se, id. p. 535) ; a-gevenep e'm eus lakaet Br. **hollek** o kouezhañ er forc'hellegezh digoret gant VALL. pa ro an termen-mañ evel kevatal ivez da Gl. *universal*, id. p. 767 (hervez ar boaz skolastek d'ober La. *generalis* eus ur perzh piaouet gant holl hiniennoù ur rumm). Azas eo enta da evezhiadenn : mar degemeromp Br. **hollek** a-geñver gant ar stadañ kantouezel e rankomp ober gant un termen all er Boelloniezh : **yauzenn hollveziat/del** enta eo an termen azas.

Dav vo donaat an dachenn-se, rak trapoù e-leizh zo enni er-maez eus ar gudenn emamp o paouez gwelout.

Kalz gwelloc'h eo Br. **darnveziat/del** eget Gl. *existentiel*. A-wel e lak ar poell a zo gant **hollveziat/del**, tra na ra an termen gallek nemet diheñchañ. Kompren a ran ez arverer aze Gl. *particulier* : ar ster-se end-eeun a roe dezhañ ar Boelloniezh klasel ; diouzh ret, ober enta gant Br. **dibarek**. A-du ivez evel just gant **darnerdalat/del** ha **darnerdalader**<sup>1</sup>.

[...]

Evit komz a hollveziadelezh er gedvuhez ha n'eo ket mui er Vezoniezh e vo ret resisaat an traoù deiz pe zeiz. Evel ma verke Paol Keineg en noz all, evit d'ar sevenadur gall ahelañ diouzh an hollveziadelezh, n'en deus ket paouezet a ezvevennañ lodoù bras ouzh bras eus ar veziadelezh (tud ha traoù). Dav e vo diforc'hiñ ar mennozioù hollveziadek (ar re kentradet gant an Dispac'h da skouer) emledet d'an hollved ha bev bepred, diouzh ar gwerc'heladoù politikel renet gant ar Frañsizion en anv ar mennozioù-se. Heñvel dra gant an Dispac'hioù all hag ivez gant an Iliz (*katolik* o tont eus an *to; kaqovlou* aristotelek).

---

<sup>1</sup> Dedalvezet e ve gant gounid an daouad **hollerdal-** / **darnerdal-** d'ar Boelloniezh. Kentoc'h eget an daolenn dermenoù diwar an daouad **hollek** / **dibarek** a'm boa arveret e KIS-184, id., p. 68 :

<b>A. yauzenn hollek</b>	<b>E. nac'huzenn hollek</b>
<b>B. yauzenn dibarek</b>	<b>O. nac'huzenn dibarek</b>

e ve un tamm mat azasoc'h termenoù an daolenn-mañ :

<b>A. yauzenn hollerdalat</b>	<b>E. nac'huzenn hollerdalat</b>
<b>B. yauzenn darnerdalat</b>	<b>O. nac'huzenn darnerdalat</b>